

Diell 1 : Disklêriadur hollvedel gwirioù mab-den 1948


Mellad 19:

Pep hini en deus gwir d'ar frankiz d'ober e veno ha d'en disklêriañ, da lavarout eo gwir da chom hep bezañ trubuilhet en abeg d'e vennozhioù, gwir da glask, da resev ha da skignañ keleier ha mennozhioù, dre n'eus forzh pe zoare disklêriañ, hep teurel pled ouzh an harzoù.

**Diell 2 : Disoc'hoù ar sondadeg meno savet get Sofres, d'an 18- 22 a viz An Azvent 1998, Télérama, n°2558, genver 1999**

**Diell 3 : ur skipailh eus ar skinwel get tud yaouank ar c'harter Cronenbourg e Strasbourg. E-pad ar goañv 1997-1998 e oa bet taolioù-tan otoioù é kreskiñ. Skigniñ**

a ra ar mediaoù leun a skeudennoù hag atersadennoù hag e oant bet tamallet da daoliñ un dreist feulster,



Diell 4 : pennad embannet er gazetenn Le Point d'an 18 aviz Eost 2000.

"... Abaoe an afer Yahoo!. E-lec'h e oa kinniget get ur servij preniñ e sav-taol binvioù arouezel an IIIVet Reich. N'eus ket tu jediñ lec'hiennoù gouennelourel , propaganda neo-nazi war ar Genrouedad... Get he saverezh vedel, ar Genrouedad a c'hell kinnig ha digor pajennoù a bep lec'h . Ar goulenn pennañ eo lakaat e-pleustr ar lezennoù... " Olivier Bruzek

Goulennoù :

- 1) diell 1: peseurt frankizoù pennañ e vez distilhet en disklêriadur-mañ?
- 2) diell 2: roit anvioù ar pevar media implijet er sondadeg-mañ? Perak ee eus tu komz a liesegezh ar c'heleier? Peseurt renad politikel a warez anezhe? Peseurt media a vez plijet d'ar muiañ d'an dud?
- 3) Diell 3 : petra a oa rebechet d'ar media-mañ? Perak? Petra a rank ar mediaoù doujñ a-benn parraat d'ar rebechoù-se?
- 4) Diell 4: Peseurt dañjerioù a vez get ar Genrouedad?

**Pennad arguziñ**

En ur pennad arguzennet pemzek linenn anezhañ e responter d'ar goulenn-mañ:

Penaos a c'hell ar mediaoù aesaat an titouriñ hag ar c'hemenn met ivez e c'hell levezoniñ ar meno foran ha perak e rank bout implijet get evezh?